



HAL
open science

Neptune Hippius ha roue Marc'h e zivskouarn marc'h

Patrice Marquand

► **To cite this version:**

Patrice Marquand. Neptune Hippius ha roue Marc'h e zivskouarn marc'h. Hor Yezh, 2007, 251, pp.3-17. halshs-00612948

HAL Id: halshs-00612948

<https://shs.hal.science/halshs-00612948>

Submitted on 1 Aug 2011

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.

Patrice Marquand

Skol-Veur European Breizh, F-35000 Roazhon, Frañs

Skol-Veur Roazhon 2, CRBC, EA 4451, F-35000 Roazhon, Frañs

Neptune Hippius ha roue Marc'h e zivskouarn marc'h

1 - Enskrivadur Douarnenez

D'ar mare galian-ha-roman e voe Douarnenez, Bro ar C'hap, ar Vro-Vigoudenn ha gourenez Kraozon zoken, lec'hioù a-bouez a-fet kenwerzh ha greanterezh (produerezh ar *garum* da skouer). Poblet-mat e oa ar c'horn-bro-se, unan eus ar re bobletañ e kornôg Arvorig d'ar mare-se, ha porzh-mor Douarnenez a oa unan eus ar c'hêrioù brasañ¹.

Ar rannbarzh-se, etre gourenez Kraozon ha Kemper, a oa ivez ul lec'h a-bouez a-fet ar relijion, ne vern pehini e ve, abaoe ar marevezhioù koshañ, ha dreist-holl en-dro da Zouarnenez, gant Menez C'homm, Menez Lokorn ha koad Neñved, a zever e anv eus ar ger keltiek *nemeton*, « lec'h sakr », « santual »². Etre Kraozon ha Kemper eo bet kavet ar muiañ a draezennoù relijiel hag a santualioù³.

E Douarnenez ez eus bet kavet, e beg ar Ged, un delwenn eus an doue galian Esus, un delwenn eus an Douez-Vamm, un torc'h ganti en he c'herc'henn⁴ ha, war draezhenn ar Ri, e-mesk danvezioù berniet da sevel ur c'hasino, ur sichenn kollet an delwenn anezhi⁵. War ar sichenn-se e c'heller lenn gant poan an enskrivadur :

N. AVG.
NEPTVNO HIPPIO
C. VARENIUS VOLTIN
VARVS C.C.R III
POSVIT

An enskrivadur-se a voe kizellet e-kerzh an eilvet pe drivet kantved goude JK ha talvezout a ra : « A la divinité d'Auguste et à Neptune Hippius, Caius Varenus Varus, de la tribu Voltinia, curateur du conventus des citoyens romains pour la quatrième fois, a adressé (cette statue)⁶. » An dedi nemetañ da Neptune Hippius e Galia an hini eo, betek-gouzout. An doue latin Neptune Hippius a glot gant an doue gresian Poseidon Hippios, a veze azeulet stank e reter an impalaeriezh roman.

Enskrivadur Douarnenez a zo bet digejet da gentañ penn e 1952 gant Pierre Merlat en doa lennet - hep bezañ gwall sur avat - « Neptuno Hesperio », « Neptune eus ar c'huzh-heol⁷ ». Diwar-se en doa goulakaet penaos Neptuno Hesperio a vefe un doue eus ar C'Hornôg, stag ouzh Meurvor Atlantel hag azeulet gant an dud a-vor en Arvorig. Studiet eo bet an enskrivadur da c'houde gant René Sanquer⁸ a ginnigas neuze al lennadenn usveneget.

War un dro e voe dilezet martezeadennoù Pierre Merlat a-fet kehelerezh Neptune en Arvorig : René Sanquer, koulz ha Louis Pape ha Patrick Galliou d'e heul, a soñj dezhe ne sell

¹ Pape, 1978, 48, 80-82, 123-126 ha kartennoù 16, 19, 25 ; Galliou, 1983, 76-77, 126-133.

² Diwar-benn Lokorn ha koad Nevet, gwelet pergen Laurent, Treguer, 1997,87-110.

³ Pape, 1978, kartenn 22.

⁴ Pape, 1978, 174-175, 180, A-93.

⁵ Pape, 1978, A-96.

⁶ Troidigezh c'hallek gant Patrick Galliou, 1983, 134.

⁷ Merlat, 1952, 67-75.

⁸ Sanquer, 1973, 215-236.

ket an enskrivadur-se ouzh un azeulerezh-bro met degaset e voe Neptune Hippius gant marc'hadourien roman staliet e Douarnenez d'ober kenwerzh ar *garum*. Unan eus ar varc'hadourien-se a oa moarvat Caius Varenius, ezel eus ar meuriad Voltinia, ur seurt kumuniezh a strolle keodedourien roman eus Bro-Narbona (Narbonne) dreist-holl, met ivez eus Saintonge hag eus broioù all e Galia. Hervez Patrick Galliou, Caius Varenius ne oa ket un Osisme, marteze a-walc'h, nag an izili all eus ar *conventus*. Skrivañ a ra ouzhpenn : « les Celtes n'ont pas, en effet, de dieu de l'Océan [...] Il est bien peu probable qu'un dieu aussi exotique (Poseidon Hippios) ait été adoré par les sauniers armoricains..⁹ ».

Al lavarenn « Les Celtes n'ont pas de dieu de l'Océan » zo bet amprestet ger-ha-ger digant René Sanquer¹⁰ a zavee da Paul-Marie Duval¹¹ : « ...ce dieu [doue ar Meurvor] est inconnu chez les Celtes. » Padal, Paul-Marie Duval a ouzhpenn er bajenn da-heul : « ...il [Neptune galian-ha-roman] est rarement honoré sur les rivages : on l'y trouve aux Pays-Bas [...] ; sur la côte armoricaine, une dédicace honore en lui le dieu de l'Océan et ses fidèles sont des bateliers (aze, Paul-Marie Duval a gas d'ar pennad-skrid gant Pierre Merlat). [...] Il est probable que dans ces deux provinces des génies des eaux ont été rassemblés dans une dévotion particulière à Neptune. »

Met enskrivadur Douarnenez n'eo ket an dedi nemetañ da Neptune war aodoù ar Meurvor atlantel : e Galiza, e proviñs Pontevedra, hag e-kichen beolioù da fardañ hiki, ez eus bet kavet un aoter warni un enskeivadur dediet da Neptune (hep lesanv avat). Evit ar c'hellenner Millan, eus Skol-veur Compostela, e c'heller krediñ e veze azeulet eno doue keltiek ar mor, dindan e stumm roman¹².

War-fed aozadur ar *conventus* roman e c'heller kavout abeg e komzoù Patrick Galliou ivez. Hervez Robert Etienne, studiet gantañ ar *conventus*-se e Bourdel, ma veze degaset arc'hant gant ar varc'hadourien roman evit diorren o c'henwerzh e Galia e fizient merañ o aferioù en ur c'hulator dibabet e-touez pennoù-bras ar vro¹³.

Splannoc'h an traoù c'hoazh e Saintes ma kaver daou enskrivadur graet gant keodedourien roman a orin galianek. An hini kentañ, Caius Julius Rufus, a lakaas sevel, e 18 pe 19 goude JK, ur volz en enor d'an impalaer Tiberius. An dedi a ro deomp hendadoù Caius Julius Rufus, a oa mab Gaius Julius Otuaneeunus, mab-bihan da Gaius Julius Gedemon ha mab-kuñv da Epotsorovidus. An tri anv a-stroll pe *tria nomina* a verk ar romanekaet, met Otuaneeunus ha Gedemon a hañval bezañ anvioù galianek. Anv an tad-kuñv a zo keltiek da vat - savet moarvat diwar anv ar marc'h, *epos*, e galianeg - ha n'eo ket bet romanekaet. An eil, Caius Julius Victor II, a lakaas sevel un ti-kañv bras evit e dad Caius Julius Victor I, anezhañ mab Conconnetodubnus, mab-bihan Agedomopas, hag ezel eus ar meuriad Voltinia. Aze c'hoazh, Agedomopas ha Conconnetodubnus a zo anvioù galianek¹⁴.

Menegomp c'hoazh Caius Julius Marinus (« moraer »), kulator keodedourien roman e Saintes, ha mab Caius Julius Ricoveriugus, un anv hanterromanekaet. Hervez Louis Maurin, a-du gant Robert Etienne, « le conventus réunissait aussi bien les indigènes promus dans la

⁹ Pape, 1978, 128-130, 172-173 ; Galliou, 2005, 184-185.

¹⁰ Sanquer, 1973, 226.

¹¹ Duval, 1957[1976], 85.

¹² Meneget gant Sanquer, 1975, 156.

¹³ Etienne, 1962, 85 : « Ces groupements de négociants romains - véritable chambre de commerce étrangère - choisissaient leur curateur parmi les notabilités locales et le gratifiaient de la *civitas romana*. Il était leur agent consulaire. Nul doute que Burdigala n'ait eu son *conventus civium romanorum* et qu'un Bordelais n'ait rempli cette fonction de curateur. [...] Deux communautés, la romaine et l'indigène, se retrouvaient à chaque stade de la hiérarchie administrative, unies par une même foi en un maître commun. »

¹⁴ Maurin, 1978, 181-185.

cit  romaine que les citoyens romains venus de l'ext rieur s'installer   Saintes. Cette derni re cat gorie semble avoir  t  peu nombreuse¹⁵. » Hag e Douarnenez neuze ?

Diaes eo gouzout eus pelec'h e oa Caius Varenus e gwirionez. Eus Bro-Narbona, eus Saintes, eus Douarnenez, un Osisme romanekaet, evel noblañs Saintes ? Forzh penaos e c'heller krediñ e oa henvroidi er *conventus* pe, da nebeutañ, e-touez ar besketarien hag an holenerien a bourchase an danvez d'ober ar *garum*. An teknik da broduiñ holen evit ar *garum*, dre dommañ an hili, ne voe ket degaset gant ar Romaned na anavezent ket anezhañ¹⁶. Met anavezet mat e oa, abaoe oadvezh an arem da nebeutañ, gant tud an arvor, eus Saintonge da vae Menez-Mikael, gourenez Arvorig hag all ha dreist-holl¹⁷.

Gellout a reer krediñ, neuze, e voe dibabet Neptune Hippius gant meuriad Voltinia abalamour ma klote gant un azeulerezh-bro diazezet a-raok donedigezh ar Romaned. Kement-se a oa un doare difeuls da lakaat tud ar vro da gemer perzh en o c'henwerzh ha, war un dro, d'o sachañ war-du ar sevenadur roman. A-fet ar politikerezh-se e c'heller menegiñ ivez santual Trogouzel, e-kichen Douarnenez, bet savet en un doare kaer ha bras-meurbet, gant mein, etre 80 ha 100 goude JK, war aspadennoù eus ur santual galian graet gant koad hag a oa bet anezhañ etre an eilvet hag ar c'hentañ kantved kent JK¹⁸. A-benn ar fin, ne oa ket Neptune Hippius, heñvel ouzh Poseidon anezhañ, ken a-vaez-bro ha se evit holenerien Arvorig.

Rak evit gwir, « les Celtes ont h rit  de leurs plus lointains anc tres, avant m me qu'ils ne s'individualisent comme celtes, l'image d'un grand dieu des eaux, peut- tre d'abord fluviales, mais tout naturellement marines d s qu'ils ont connu mer et oc an.¹⁹ » Doue keltiek ar mor - Nechtan ha da c'houde Manannan en Iwerzhon, Manawyddan e Kembre - a zo heñvel-mik ouzh an doue gresian Poseidon. D'ar mare ma oa ar Gelted hag ar C'hresianed o chom a-gevret war bord st r Donau (e-tro ar 4vet milvet kent JK) ne oa nemet un doue hag a rene war an dourioù dre vras, un doue boutin d'an holl bobloù indezeuropat²⁰.

Perzh pennañ an doue gresian Poseidon eo e liamm gant ar marc'h - bez' e c'hell bezañ ur marc'h e-unan, hervez hengounioù zo - hag ar perzh-se a zo da vManannan / Manawyddan ivez²¹. Un delwennig marc'h zo bet kavet e gourenez Kraozon, stank enni an anvioù-lec'h savet diwar « marc'h » (Lostmarc'h, Brenvarc'h, Ronvarc'h, Pont-marc'h ha kement zo). Peadra zo da soñjal e oa ar marc'h ul loen sakr evit annezidi ar c'hourenez²². Anvioù-lec'h all, e trowardroioù Douarnenez - Portzmarc'h (Plomarc'h hiziv an deiz), nepell diouzh traezenn ar Ri - ha betek Pont-'n-Abad - Penmarc'h - a zo bet savet diwar anv ar marc'h ivez. An tolead-

¹⁵ Ibid., 149-150.

¹⁶ Sanquer, Galliou, 1972, 223. E Douarnenez e voe gwellaet hag azasaet an teknik-se ouzh ezhommoù produerezh ar *garum*.

¹⁷ Teknik ar paludoù-holen, deuet eus ar Mor kreizdouarel marteze, n'eo testeniakaet e Breizh nemet adal ar Grennamzer Uhel. Diwar-benn an teknik dre dommañ, gw. Gouletquer, 1970 ha Daire, 2003. War a seblant e vije bet gounezet holen en Arvorig ar Su ken abred ha marevezh an Neolitek, gw. Cassen, de Labriffe, M nanteau, 2006, 33-54.

¹⁸ Al lec'h a oa annezet abaoe ar 5vet-4vet kantved kent JK. Gw. Cl ment, 1979, 23-25 ; Giot, Briard, Pape, 1995, 256 ; Pape, 1995, 166 ; Galliou, 2005, 314. Roet e oa bet lañs d'ar politikerezh-se gant an impalaer Aogust a voe kroget gant ar romanekaad e Galia evit mat dindan e ren : dibabet en doa Lugdunum - kreñvlec'h an doue Lug - evel k r-benn Galia roman ha diazezet eno Bodadeg-Veur Galia, dalc'het bep bloaz d'ar c'hentañ a viz Eost, deiz gouel Lug, Lughnasad en Iwerzhon.

¹⁹ Sergent, 2004, 524.

²⁰ Sergent, 2004, 465-526. Ouzhpenn an doueed Poseidon ha Nechtan a oa heñvel an eil ouzh egile. Daveañ a reomp d'an daou levr tev-mat (Celts et Grecs, I ha II) skrivet gant Bernard Sergent diwar-benn ar vojennerezh voutin d'ar Gelted ha d'ar C'hresianed.

²¹ Sergent, 2004, 466-471.

²² Eveillard, 1975, 46 ; Tanguy, 1975, 57. Bernard Tanguy a veneg ouzhpenn, p. 67, penaos roudoù ar romanekaad er c'hourenez « demeurent faibles et limit es   quelques toponymes sp cifiques, souvent assez tardifs.

se, eus gourenez Kraozon da veg Penmarc'h, a voe dastumet ennañ, en 18vet-19vet kantved, mojenn roue Marc'h e zivskouarn marc'h.

2 - Roue Marc'h e zivskouarn marc'h

Gaël Milin en doa tostaet c'hoazh enskrivadur Douarnenez ouzh mojenn roue Marc'h e zivskouarn marc'h²³ hag emamp o vont da genderc'hel gant ar memes hent. Rak emañ Douarnenez e-kreiz an tolead pennañ m'eo gwriennet start ar vojenn-se ha stummoù anezhi zo bet pennaouet en 19vet kantved e Plomarc'h, parrez Ploare, e-kichen Douarnenez, hag e Plonevez-Porzhe²⁴. Eno, en daou lec'h-se, e voe kizellet penn ar roue Marc'h, ar pezh a verkfe marteze ur meni azeulerezh pe ar youl gant noblañsoù ar vro da berc'hennañ e vojenn, diantav. Stummoù all eus ar vojenn, disheñvel a-walc'h diouzh re Gerne, a gaver c'hoazh e Bro-Leon, e Gwitalmeze-Portsal, diwar-benn aotrou pe roue Enez Karn, hag e Sant-Fregan, diwar-benn ar roue Penmarc'h²⁵.

Hañvalout a ra bezañ bet anavezet ar vojenn-se ken abred hag an 9vet kantved : tostaet e voe ar roue Marc'h ouzh Konveur gant abad Landevenneg Wrmonoc e Buhez sant Paol Aorilian (skrivet e 884), o tamvenegiñ divskouarn ar roue war ar briz, ar pezh a ziskouez en doa marteze un anaoudegezh bennak eus mojenn roue Marc'h e zivskouarn marc'h :

E-keit-se, endra ma sevene oberoù mat all dre c'hras Doue, ar brud anezhañ a nijas betek divskouarn ar roue Mark, a roer un anv all dezhañ : Konomor (Quonomorus). D'ar mare-se e oa roue war un douar a oa e harzou da bell ; anavezet oa evel un den a-bouez hag ampart-kenañ en e garg a rener, kement ma suje d'e c'halloud peder fobl a yezh disheñvel²⁶.

Abati Landevenneg a oa perc'henn war zouaroù e gourenez Kraozon, e Bro-Porzhe hag e Kab-Kaval, tro-dro da Bloneour-Lanwern²⁷. An douaroù-se a glot mat gant an tolead m'eo gwriennet mojenn ar roue Marc'h. Dre-se e c'hellfed goulakaat e klevas komz menec'h Landevenneg eus ar vojenn-se eno.

Etre mojenn hag Istor emañ ar pezh a ouzomp diwar-benn Konveur. Meneget eo gant Grégoire de Tours en *Historia Francorum* (IV, § 4) dindan ar stummoù *Chonomor*, *Cunomor*, *Conomor*²⁸. E-tro 550 e roas bod da vMacliau, breur Chanao, a glaske ren e-unañ war Vro-Wened dre lazhañ e holl vreudeur. Grégoire de Tours a ro da Gonveur an titl a gont²⁹, met war a seblant en doa muioc'h a atebegzh eget se. N'eo nemet ur penn estren da Vreizh-Vihan e *Buhez sant Samzun* (savet en 8vet kantved), *Commorus* e anv, ha tamallet dezhañ bezañ skrapet ar galloud e Devnon goude bezañ prenet skoazell ar roue Childebert. Lazhet gantañ ar penn reizh Jonas e oa e-sell ober memestra d'e vab Judual, pa zeuas sant Samzun da sikour

²³ Milin, 1991, 226-227 notenn 52, 239 notenn 79.

²⁴ Milin, 1991, 223-226, 232-237.

²⁵ Milin, 1991, 199-213. Da notenniñ eo dianav a-grenn ar vojenn-se e Frañs e-maez eus Breizh-Izel, nemet dre romant Tristan gant Beroul, en 12vet kantved.

²⁶ Tanguy, 1990a, 177. Brezhoneg ganeomp diwar an droidigezh c'hallek.

²⁷ Simon, Castel, 1985, 81-83.

²⁸ Loth, 1890, 44, 49 ; Fleuriot, 1999, 239.

²⁹ « Macliauis [...] a dec'has kuit davet ur c'hont all eus ar vro-se a oa Chonomor e anv. »

her Devnon. Trec'het ha lazhet e voe Konveur gant Judual e fin ar gont³⁰. Padal, e *Buhez sant Paol a Leon* eo bet lakaet da roue³¹ dindan bluenn Wrmonoc.

Met ar c'harg pennañ bet fiziet e Konveur, gant ar roue frank Childebert moarvat, eo hini *praefectus classis*, ha kement-se a weler splann e *Buhez sant Herve*, bet skrivet en 13vet kantved, met o vodañ elfennoù koshoc'h, stummoù henvrezhonek an anvioù-tud hag an anvioù-lec'h pergen³². Er Vuhez-se e weler Konveur oc'h ambroug Hoarvian, tad Herve ha barzh Childebert, eus Breizh-Vihan da Vreizh-Veur :

Pa oa erru poent distreiñ d'e vro e voe roet da Hoarvian e walc'h a brofoù ha lizhiri a-berzh ar roue a roe urzh da Gonveur, pefed ar roue, ambroug anezhañ war vag betek e vro genidik³³.

Diwar-se e c'heller soñjal e oa karget Konveur, dre ma rene war an daou ribl eus Mor-Breizh ha dre ma oa e penn morlu Breizh, d'ober war-dro divroañ ha mont-dont e genvroiz. Seul vui ma reer anv e Triadennoù Enez Preden eus ur penn morlu all, March mab Meirchiawn³⁴, a zo moarvat en hengoun kembraek an hevelep den ha Marc'h Konveur eus Devnon. Tostaet e vez ivez Konveur ouzh Kynvawr, meneget meur a wech e ac'hoù Kembre, *Bonedd y Saint* hag *Ach Morgan ab Owein*. Kynvawr a vefe gourvab Kynan (da lavaret eo : Kenan Meriadec) ha tad Custennin Gornev (Kerne-Veur)³⁵. Hemañ diwezhañ a hañval bezañ hevelep den ha Custennin Devnon, unan eus an diened vreton gourdrouzet gant Gweltaz³⁶. An tiern a zeu war-lerc'h Custennin e skandaloù Gweltaz, *Aurelius Caninus*, a c'hell bezañ tostaet, diwar e anv latin (caninus : ar c'hi) ouzh Kynvawr ha neuze Konveur, a vefe e anv klok *Marcus Aurelius Commorus*³⁷.

Ar gontadenn AT 782 er broioù keltiek

Mojenn roue Marc'h e zivskouarn marc'h a glot gant ar gontadenn-skouer AT 782 - roue e verkoù loen - a voe staget ouzh March mab Meirchiawn an hengoun kembreat³⁸. March mab Meirchiawn a zo unan eus tri *Llyghessawc* Enez Preden, ur ger a sinifi « moraer », « morlaer », pe « harluad »³⁹ hag a ra dave, moarvat, da dreizhadennoù niverus Mor-Breizh da vare ar rouantelezhioù doubl, dindan evezh ar penn morlu a vefe bet March anezhañ, marteze a-walc'h hevelep den ha Konveur.

Padal e voe roet ar memes lesanv d'ar roue mojennel iwerzhonat Labraid Loingsech, *Loingsech* o vezañ heñvelster ouzh *Llyghessawc*. En hengoun iwerzhonat e voe staget ar gontadenn-skouer AT 782 ouzh daou roue mojennel a-benn ar fin : Eochaid - da lavaret eo Eochaid Ollathir, an Dagda⁴⁰ - ha Labraid Loingsech. Evel an Dagda ha reoù all, Labraid a

³⁰ Flobert, 1997, I, § 53-59.

³¹ Diouzh al lec'h ken diouzh ar mare eo bet taolennet Konveur e Buhezioù sent en un doare gwall zisheñvel : ar re savet e Bro-Leon - Buhezioù Paol ha Goueznou - a lak war wel kentoc'h e duioù mat hag e c'halloud tra m'eo ar c'hontrol-mik er Vuhezioù savet e reter pe kreisteiz Breizh. Adalek kreiz an 11vet kantved ne vo sellet outañ nemet evel un alouber pe ur muntret. Gw. Bourgès, 1996, 424.

³² Tanguy, 1990, 31-33.

³³ ibid, 109. Brezhoneg ganeomp diwar an droidigezh c'hallek.

³⁴ Bromwich, 1961[2006], triadennoù 14, 26, 71, 73, p. 435-438.

³⁵ Merdrignac, 2004, 273-274.

³⁶ Kerboul-Vilhon, 1997, 41-42, § 28.

³⁷ Bourgès, 1996, 425.

³⁸ Bromwich, 1961[2006], 435-438 ; Milin, 1991, 177-196.

³⁹ Bromwich, 1961[2006], triadenn 14, 28-29.

⁴⁰ Milin, 1991, 47-83.

vefe un doue kozh lakaet da vezañ ur roue istorel pe istoreloc'h, « evhemerizet » neuze. E mojennoù iwerzhonat zo eo Labraid breur-kaer Manannan mac Lir, pe c'hoazh tad Nechtan.

Evel-se eo liammet Labraid gant gant ar mor ha gant ar marc'h. Tost-kar eo ouzh Nechtan hag an doue-se a glot gant an doue indezat-hag-iranat Apam Napāt, gant an doue gresian Poseidon ha gant an doue latin Neptunus⁴¹. Aze hon eus ul liamm kreñv etre roue Marc'h ar vojenn, dre e stumm iwerzhonat pergen, ha Neptune Hippius.

3 - Doueed keltiek o divskouarn marc'h, doueed keltiek an doureier, ha Poseidon

Ouzhpenn al liamm gant ar marc'h e hañval bezañ donoc'h ar gerentiez e brezhoneg, diouzh un tu, ar roue Marc'h hag e stummoù eus Kembre hag eus Iwerzhon, doueed keltiek an doureier, ha Poseidon diouzh un tu all. Un toullad perzhioù ha mojennoù boutin da bPoseidon ha da vManannan a zo bet pennaouet ha studiet gant Bernard Sergent⁴² ha lod eus ar perzhioù-se a c'hellfe bezañ roet da roueed keltiek o divskouarn marc'h, a gav deomp.

Ar verdeidi

Komzet hon eus a-us eus al lesanv roet da Labraid ha da vMarch mab Meirchiawn, hag eus ar c'harg a benn morlu bet fiziet e Konveur. Labraid en deus ur vagig, evel Manannan, hag en ac'hoù Leinster e vez deskrivet evel *solam for muir, maith ri imram*, « prim war ar mor, merdead hardizh »⁴³. Paeroniañ a ra ar redadegoù bigi ha kezeg⁴⁴, ha Poseidon, diouzh e du, eo paeron ar redadegoù kezeg ha kirri⁴⁵.

An enezennoù hag ar Bed All

Doue ar mor a zo o chom en un enezenn - Manannan ha Manawyddan a voe anvet diouzh Enez Vanav ha n'eo ket ar c'hontrol⁴⁶ -, evel Labraid⁴⁷, evel aotrou pe roue Enez-Karn e Gwitalmeze, evel ar roue Guivarc'h en Enez ar Marc'h eg e-kichen Pont-'n-Abad⁴⁸. Ar barzh kembreat Dafydd ap Gwilym (14vet kantved), en ur varzhoneg savet diwar-benn Blodeuwedd (*Achau y Dulluan*, « ac'h an toud »), a ra anv eus March mab Meirchiawn, o chom en Enez-Von :

Merch i arglwuyd, eil Meirchion,
Wyf i, myn Dewi, o Fon.

Me zo, en anv sant Dewi,
Merc'h d'un aotrou, mab Meirchion, eus Enez-Von.

⁴¹ Dumézil, 1995, III, 1091-1161 ; Sergent, 2004, 465-526.

⁴² Sergent, 2004, 465-520.

⁴³ T.F. O'Rahilly, *Early Irish History and Mythology*, Dublin, DIAS, 1946, p. 106, notenn 2, meneget gant Milin, 1991, 108.

⁴⁴ « Redadegoù bigi ha kezeg e-tal an enezenn e-lec'h m'emañ Labraid. », kleñved Cuchulainn, meneget gant Milin, 1991, 104.

⁴⁵ Sergent, 2004, 472.

⁴⁶ Sergent, 2004, 526.

⁴⁷ Sellit ouzh an notenn 44 a-us.

⁴⁸ Milin, 1991, 229-231 ha notenn 60. Da notenniñ e voe roet daou anv d'an enezenn-se, *Gueltas* (diouzh ar sant) ha *Chevalier* (diouzh ar vojenn). Gwelet e vo en ur studiaden all penaos un enezenn all, liammet ivez gant ar roue Marc'h, a voe roet daou anv dezhi ivez.

Enez-Von a veze sellet outi evel unan eus inizi ar Marv hag eno e oa tud ar Bed All o chom⁴⁹. E hengounioù pobl Kembre emañ demeurañs March mab Meirchiawn e Castellmarch, e gourenez Llyn, e Hanternoz Kembre⁵⁰. En un enezenn eus ar Bed All e oa Labraid o chom ivez, a-gevret gant bagadoù merc'hed⁵¹. Dimezet eo gant unan eus merc'hed ar Bed All, Liban, c'hoar Fand, ha homañ diwezhañ eo gwreg Manannan. Notennet e vo ivez penaos e Bro-C'hres, evel en Iwerzhon pe e Kembre, e vez sellet ouzh douaroù ar C'hornôg pe ar Mervent evel dorioù hag a zigor war ar Bed All⁵². Mervent bro an Osismi, eno eo e voe dastumet mojenn ar roue Marc'h en 19vet kantved. Er vro-se ivez e veze lec'hiet ar Bed All gant Breizhizeliz : en Enez-Sun, lec'h ma oa nav gwerc'hez o chom⁵³.

Lennoù ha stêrioù

Ar verdeidi-se a zo liammet gant an dour dous ivez, evel Poseidon, Manannan ha Nechtan⁵⁴. Ur stumm iwerzhonat eus mojenn roue e zivskouarn marc'h a gont penaos ar roue-se (Labhar, da lavaret eo Labraid) a oa o chom en ur c'hastell e-kreiz ul lenn. Al liamm marc'h-lenn a zegas deomp d'ar folklor iwerzhonat diwar-benn ar marc'h-dour pe « puca ». Ar « puca » a zo ur marc'h hud hag a vev dindan dour. Roet en deus e anv d'ur bern lennoù, feunteunioù pe stêrioù. Kement lenn annezet gant ur puca a zo tri ferzh dibar dezhi : n'eus foñs ebet dezhi, he dourioù a chom fresk atav, goude ma vefe gor an amzer ; dibosupl eo d'an ampartañ talmer teuler ur maen eus un eil ribl d'egile : ar maen a gouezh e-kreiz an dour.

Al lenn-se a vez sellet outi gant ar gouerien evel ul lec'h sakr ma'z eont davit dour, met ne gredfent ket kouronkal enni. N'a ket ar maouezed da gannañ o dilhad enni gant aon da zirenkañ al loen a zo o kousket er strad⁵⁵. Stummoù all a ginnig ar puca evel ul lubaner a dro e neuz en ur paotr yaouank evit touellañ ar merc'hed⁵⁶, ar pezh a zegas soñj eus mojennoù diwar-benn Poseidon⁵⁷.

Diouzh un tu all e klot anv Labraid gant an henvrezhoneg *labar* - lavar e brezhoneg a-vremañ - pe c'hoazh gant ar galianeg *labarus*, a sinifi « teodek », « trouzus ». Labarus eo ivez anv un doue galian ha war a seblant e voe anvet meur a ster dioutañ er broioù bet aloubet gant ar Gelted Gozh⁵⁸.

⁴⁹ Milin, 1991, 179.

⁵⁰ Milin, 1991, 183-188. « La péninsule du Nord est encore connue sous le nom de *Lleyn*, de l'irlandais *Laigin*, 'les gens du Leinster', et le petit village de Nevin Bay porte le nom de *Porth Dinllaen*, 'le port du fort des gens du Leinster'. », Guyonvarc'h, Le Roux, Dillon, Chadwick, 2001, 59. E-doug ar 4vet hag ar 5vet kantved e voe trevadennet Dyfed hag ul lodenn vat eus Gwynedd (kornioù-bro Caernarfon, Enez Môn, Merioneth) gant morlaeron iwerzhonat deuet dreist-holl eus Leinster, rouantelezh Labraid Loingsech.

⁵¹ « Labraid a zo o chom war bord ur mor pur, darempredet gant bagadoù merc'hed. », *kleñved Cuchulainn*, meneget gant Milin, 1991, 104.

⁵² Sergent, 2004, 501.

⁵³ Pe c'hoazh e Kêr-Is, da dostaat ouzh ar ger kembraek Annwfn, **ande-dubno*-, « bed an traoñ », implijet evit ober anv eus ar Bed All (Lambert, 1993, p. 355, notenn 6). « Bae an Anaon » a c'hellfe bezañ intentet neuze evel « bae ar Bed All ». Lec'hiet e vez Kêr-Is e bae Douarnenez ivez.

⁵⁴ Poseidon a laka mammennoù da strinkañ, Manannan a ra memes tra gant al lennoù hag ar stêrioù, Nechtan eo gward mammenn Seaghais. Gw. Sergent, 2004, 475-480.

⁵⁵ Diwar J.J. Prévost, *Un tour en Irlande*, p. 134, meneget gant Milin, 1991, 130. Ar meneg eus ar gor a zegas soñj eus ar fed ma veze lidet gouel Neptune, doue an dourioù e Roma, d'an 23 a viz Gouere, e penn-kentañ koulzad ar gor (gw. Dumézil, 1995, 1135-1139). Hag ar fed na greder ket kouronkañ el lenn, nemet puñsat dour anezhi, a zegas soñj eus al lidoù indian diwar-benn Apam Napât pe c'hoazh eus ar vojenn iranad diwar-benn Franrasyan hag al lenn Vourukasa. Gw. Dumézil, 1995, 1094-1095 et 1098-1099.

⁵⁶ Milin, 1991, 134-135.

⁵⁷ Sergent, 2004, 467.

⁵⁸ Milin, 1991, 102-112.

Brezelourien ha roueed

Labraid a seller outañ evel diazezour rouantelezh Leinster, Laigin en heniwerzhoneg. An anv-se a zevefe eus an anv boutin laigin, o termeniñ ur seurt goafioù a voe Labraid an hini kentañ o fardañ anaezhañ⁵⁹. Hogen, unan eus moranvioù Manannan eo Gaer, marteze awalc'h « Goaf », eus an hengeltieg *gaiso*-. Manannan a vez ur brezelour a-wechoù, gantañ ur c'hleze galloudoù hud dezhañ. Arm milanavezet Poseidon eo an tridant met ur c'hleze hir, heñvel ouzh ul luc'hedenn, a zo gantañ ivez. Ha Labraid a oar ober gant ur c'hleze : « Il y a un guerrier qui a fait au-delà des mers une multitude d'exploits/ c'est Labraid, le rapide manieur d'épée⁶⁰. » Labraid a vez lesanvet Lorc ivez, un anv roet c'hoazh d'e dad-kozh Loegaire Lorc. Lorc, evel anv-gwan, a dalv « ferv », « kriz », hag evel anv-kadarn, « muntr », pe « muntr un den kar » zoken⁶¹.

Un den drouk ha kriz eo March mab Meirchiawn e hengoun pobl Kembre⁶². Aze e c'heller menegiñ Konveur, kinniget abred-mat - adal Buhez sant Samzun en 8vet kantved - evel alouber rouantelezh Devnon, lazhet gantañ ar rieg reizh Jonas ha war-nes ober e stal d'an hêr Judual⁶³. Brud fall Konveur ne ray nemet kreskiñ da c'houde, dindan bluenn Vitalis e Buhez sant Gweltaz, da skouer : lazhañ a ra ingal e wragez, en o zouez santez Trifin, dibennet gantañ⁶⁴. Perzhioù brezelour Konveur a gaver ivez en e anv : « ki meur » koulz ha « kadour meur ».

Wrmonoc, e Buhez sant Paol Aurilian, a ro dezhañ an titl a roue ha Labraid eo roue diazezour Leinster. March mab Meirchiawn, evit e gelo, a zeuy da vezañ roue March ar romantoù diwar-benn Tristan hag Izold. Evit a sell ouzh Marc'h eus Kerne-Izel, hogos an holl stummoù dastumet a ro an titl a roue dezhañ. Manannan eo roue diwezhañ an Tuatha Dé Danann, ren a ra war ar Bed All ha Poseidon a vez graet Basileus (roue e gresianeg) anezhañ a-wechoù⁶⁵.

Doue ar mor ha doueez ar brezel

E folklor Iwerzhon eo bet mesket ar gontadenn-skouer AT 782 gant hini AT 2400 - mantell santez Berc'hed -, ha liammet ar santez gant roue e zivskouarn marc'h⁶⁶. Santez Berc'hed eo ar stumm kristenaet eus an doueez keltiek Belisama, Brigit en Iwerzhon ; ingal e vez liammet ivez gant ar Werc'hez Vari ha kement-se adal an testennoù iwerzhonat koshañ. Stank-tre e vez azeulet Berc'hed e Breizh, stankoc'h eget ar peurrest eus ar c'hevandir⁶⁷.

Hogen, ur vojenn lec'hiet nepell diouzh Douarnenez, war ar Menez-C'homm, a dosta ar roue Marc'h ouzh ar Werc'hez Vari. Ar vojenn-se a voe dastumet e 1873 gant René François Le Men, ha da c'houde, e 1893, e voe embannet ur stumm all anezhi gant Anatole Le Braz. Ar stumm dastumet gant Le Men a ra anv eus ur roue na voe ket direbech e vuhez. Sebeliet e voe war tor ar Menez-C'homm. Evit tennañ ene ar roue-se eus ar Purkator e rank neb a dremen

⁵⁹ « Loingsech s'empara de la souveraineté de l'Irlande, et il fut le premier à faire de larges lances bleues (laigen), ce qui est à l'origine du nom des Laigin (habitants du Leinster). », *Panegyrique de Saint Colomba*, meneget gant Milin, 1991, 94-95.

⁶⁰ Meneget gant Milin, 1991, 108, notenn 51.

⁶¹ Milin, 1991, 91, notenn 12. Loegaire a voe lesanvet evel-se dre m'en doa lazhet Badhbhchaid dre dreitourzh, hervez Keating, *History of Ireland*.

⁶² Milin, 1991, 186.

⁶³ Flobert, 1997, I, § 53-59.

⁶⁴ Kerboul-Vilhon, 1997, 151-155.

⁶⁵ Sergent, 2004, 493.

⁶⁶ Milin, 1991, 118-124.

⁶⁷ En hengoun Breizh, evel en hengoun Iwerzhon, eo Berc'hed pe gwiliouderez ar Werc'hez Vari, pe mamm Jezus. Gw. Sanquer, Laurent, 1971, 104-106.

hebiou d'e vez teuler ur maen warnañ ha pa vo uhel a-walc'h ar Bern-Mein abalamour d'an ene da welet chapel Itron-Varia ar Menez-C'homm e vo dieubet ha kaset d'ar Baradoz. Merc'hed zo a zegase mein gante zoken, leun o zavañjer, d'o zeuler war ar Bern-Mein.

Stumm Le Braz a ro muioc'h a ditouroù : ar roue a oa ar roue Marc'h. Pa varvas e fellas da Zoue e zaoniñ abalamour d'e bec'hedoù niverus. Met Marc'h a gehele kalz ar Werc'hez Vari hag a-drugarez da se e voe difennet ganti davet Doue a asantas chom hep daoniñ Marc'h neuze, gant ma chomo e ene en e vez ken na vo uhel a-walc'h ar bez-se abalamour d'ar roue da welet tour chapel an Itron Varia. Evel-se ne vefe ket daonet e ene met ne vefe ket saveteet kennebeut. Met ar Werc'hez Vari a c'hoarias un dro-gamm da Zoue : degas a reas mein e plegoù he sae, diouzh an noz, d'o zeuler war vez e vignon evit e uhelaat. Lavaret a rae d'ar veajourien ober kemend-all⁶⁸.

Ar Werc'hez Vari o tougen mein e plegoù he sae a zegas soñj eus ar mojennoù diwar-benn ar boudiged o dije savet ar peulvanoù hag an taolioù-maen⁶⁹, met ivez eus ar c'hannerezed-noz, gwalc'het gante, e-pad o buhez, dilhad an dud gant mein evit esperniñ soavon, hag abalamour da se int bet kondaonet da walc'hiñ dilhad dizehan, diouzh an noz hag o marv-pad, gant mein degaset gante en o zavañjer. Evit Christian-Joseph Guyonvarc'h, « la lavandière de nuit bretonne est bien une survivance, oubliée et atténuée, de la déesse celtique de la guerre⁷⁰. »

Ne vez ket enoret ar Werc'hez Vari er Menez-C'homm dre zegouezh, war a seblant, met ul liv kristen zo bet roet d'un azeulerezh koshoc'h, gouestlet d'an doueez keltiek Belisama. 800 metr eus chapel an Itron Varia e oa un templ galian-ha-roman. Nepell alese, e Dineol, ez eus bet kavet , e 1913, aspadennoù eus un delwenn arem bet douaret en ur guzhiadell. An delwenn-se a skeudenn ur plac'h yaouank, ganti war he fenn un tokarn stumm « roman-ha-corinthian », treset warnañ ur re zaoulagad a laka da soñjal e daoulagad ur gaouenn, labous an doueez gresian Athena.

Evit gwir, an oberenn-se a voe savet er c'hantved kentañ goude JK gant arzourien eus ar vro bet levezonet gant stummoù gresian - stil ar fichañ blev pergen - kentoc'h eget gant stummoù roman rak skañv a-walc'h e oa pouez ar romanekad e kornôg Arvorig d'ar mare-se⁷¹. War gern an tokarn, dindan ar melkern, un alarc'h gouez, peuzheñvel ouzh laboused ar Bed All keltiek. Tokarnioù a-seurt-se, ul labous war ar c'hern anezhe, n'int ket rouez en arz keltiek, unan a weler war gaoter Gundestrup, da skouer. Reoù all zo bet kavet gant an henoniourien, e Roumania pe e Corent (Aovergn) nevez zo.

Neuze, daoust ma voe awenet oberour an delwenn gant ur patrom gresian e oa keltiek an azeulerezh anezhi hag an doueez kehelet ne oa ket Athena ar C'hresianez, na Minerva ar Romanez, met o c'henseurtez kelt Belisama⁷². Dre ma voe dilec'hiet an delwenn evit he c'huzhat e c'heller soñjal e veze azeulet da gentañ penn en templ galian-ha-roman, war tor ar Menez-C'homm, e-kichen chapel an Itron-Varia⁷³.

Erfin, perzh ar Werc'hez Vari e mojenn bez ar roue Marc'h a zegas koun eus hini ar voudig Morgan – Morrigan en Iwerzhon, ur stumm all eus doueez veur ar Gelted – e-kichen

⁶⁸ Milin, 1989, 21-23.

⁶⁹ Ibid., p. 32, notenn 29.

⁷⁰ Guyonvarc'h, Le Roux, 1983, 79-87. Tem ar c'hannerezed-noz a zo hollgeltiek. Kavet e vez en Iwerzhon gant Morrigan hag e Kembre gant Modron (gw. Bromwich, 1961[2006], 449-451).

⁷¹ Sanquer, Laurent, 1971, 85-102 ; Sanquer, 1973a, 63-80.

⁷² Diwar-benn ar perzhioù boutin etre Athena ha doueez veur ar Gelted (Belisama, Bodb, Macha ha kement 'zo), gw. Sergent, 2004, 423-463.

⁷³ Sanquer, 1973a, 64.

Arzhur p'emañ-eñ o kousket en Enez-Avalon, un enezenn deuet da vezañ ur menez a-wechoù, diouzh stummoù ha lec'hiadoù ar vojenn, evel menez-tan Etna e Sikilia⁷⁴.

Met an darempredoù etre ar roue Marc'h hag an doueez keltiek a c'hell bezañ lakaet keñver-ha-keñver gant al liammoù tost a zo etre Poseidon hag Athena e mojennerezh Gres. Athena, doueez werc'h anezhi, n'eo ket gwreg Poseidon met alies e vezent azeulet a-gevret, er memes santualioù pe e santualioù amezek, un tamm evel Belisama ha Marc'h er Menez-C'homm. Da notenniñ ivez penaos, e Douarnenez, eo bet kavet sichenn an delwenn dediet da Neptune Hippius nepell diouzh un delwenn eus un doueez-vamm, un torc'h ganti en he c'herc'henn, ar pezh a verk hec'h orin keltiek.

« Athéna et Poséidon sont en fait des divinités complémentaires, car c'est l'intelligence, l'adresse de la première, qui permet à l'humanité d'affronter la sauvagerie du second⁷⁵. » Aze c'hoazh e c'heller tostaat ar fed-se – Athena ha Poseidon en em gloka an eil egile – ouzh mojenn Menez-C'homm : a-drugarez d'he spered-lemm ha d'he finesa e teu a-benn ar Werc'hez Vari da douellañ an Aotrou Doue – tonkañ a ra ur marc'had forc'hellek gantañ – ha da saveteiñ evel-se ene Marc'h, bet daonet abalamour d'e vuhez diroll. Spered-lemm ha finesa, setu perzhioù a zo da santez Berc'hed en Iwerzhon ivez, pa vez roet dezhi gant Labraid, roue e zivskouarn marc'h, kement a zouarou ha me c'hello-hi goleiñ gant he mantell, ur mantell hud ha war astenn. Hag evel Poseidon, Athena a eo liamet gant ar c'hezeg, Hippias a vez graet anezhi alies. Gant-se eo heñvel ouzh Macha en Iwerzhon, Epona e Galia ha Rhiannon e Kembre. Ha gant Manawyddan, heñvel ouzh Poseidon anezhañ, e timez Rhiannon e trede skourr ar Mabinogion⁷⁶.

Maponos, Owein ha Kynvarch mab Meirchiawn

An doue galian Maponos, an « doue-mab », a zo heñvel ouzh Apam Napāt, a dal e anv kement ha « ar mab-bihan », « an niz, mab ar c'hoar » pe c'hoazh « an diskennad eus an doureier »⁷⁷. Maponos, dindan e anv brezhonek *Mabon*, a zo meneget e meur a vojenn gembraek a c'heller tostaat ouzh hengounioù gresian a-zivout Poseidon⁷⁸. *Modron* eo e vamm, un anv a zever eus an anv hengeltiek *Matrona*, « mamm » a voe anvet meur a stêr dioutañ, ar Marne en o zouez⁷⁹.

Diouzh un tu all, Mapon/Maponos a zo anavezet dre un anv all, Pryderi, haroz pennañ ar Mabinogion a-benn ar fin, goude ma n'eus ket anv anezhañ er Pevar Skourr, rak *Mabinogion* a zerver eus **Maponiaca* (istorioù diwar-benn Maponos) ha perzhioù heñvel a zo da Bryderi ha Mabon, ar fed ma vezont bac'het peurgetket. Memes mod e c'heller tostaat Modron, mamm Mabon, ouzh Rhiannon, daou anv evit an doueez kelt Epona⁸⁰.

Mabon a zo liamet strizh ivez gant Owein a voe lesanvet Mabon e div varzhoneg kembraek⁸¹ hag an daou anv-se a zo liamet dindan ar stumm Mabonagrain, da lavaret eo an

⁷⁴ Milin, 1989, 27-33.

⁷⁵ Sergent, 2004, 488-490.

⁷⁶ Sergent, 2004, 435-441 ; Sterckx, 1986, 40-47.

⁷⁷ Dumézil, 1995, III, 1106-1110 ; Sterckx, 1986, 85.

⁷⁸ Mabon a zo meneget en Triadennoù kembreat evel unan eus tri frizoniad meur Enez-Preden (Bromwich, 1961[2006], triadenn 52, 146-149), ur perzh a gaver ivez e Culhwch ac Olwen, lec'h m'eo bachel en ur c'hreñvlec'h war ribl ar stêr Habren (Lambert, 1993, 153-154) ; Apam Napāt a zo bac'het er Samudra, ur c'hev leun a zour, kof un aerouant e gwirionez ha Poseidon zo bet lonket gant e dad Cronos. Dieubet int bet da c'houde gant doueed tost a-walc'h an eil ouzh egile : Zeus, Indra pe Savitr hag...Arzhur. Gw. Sergent, 2000, 205-206.

⁷⁹ Ar c'hiz a oa gant ar Gelted da reiñ anvioù o doueezed d'ar stêrioù : ar stêr Boyne en Iwerzhon a zeu eus anv an douez Boann. Gw. Sterckx, 1986, 68, 81-82.

⁸⁰ Sterckx, 1986, 59, 65.

⁸¹ Ibid., 62 ; Bromwich, 1961[2006], 425-426, 451.

distummadur eus *Mabon ac Owein*, a gaver er romant henc'hallek *Erec et Enide* pergen⁸². Mabon hag Owein o deus ar memes mamm, Modron, hervez an hengoun, hag Owein a zo lakaet da vezañ mab Urien Reget ha Modron en driadenn 70 :

Owein mab Vryien a Moruud uerch Vryen ac Anarun Archesgob Llydaw, o Vodron merch Auallach eu mamm⁸³.

An driadenn-se a ra dave d'ur gontadenn miret en dornskrid Peniarth 147 : Urien Reget a gej gant merc'h roue Annwfn a zo o walc'hiñ e-kichen ur roudour, ar pezh a rank ober ken he do ur mab gant ur c'hristen. Lavaret a ra neuze da Urien en do ur mab diganti ma teu en-dro a-benn bloaz. A-benn ar fin en do ur mab hag ur verc'h, Owain ha Morfudd. Merc'h roue Annwfn eo Modron merc'h Avallac'h, evel-just⁸⁴. E Buhez sant Kentigern, skrivet e Skos etre 1147 ha 1164, e kaver mui pe vui an hevelep kontadenn bet lakaet war gont Euwen mab Urien a wall merc'h Leudonus ha diwar se e voe ganet ar sant⁸⁵. Ar vojenn-se a gaver ivez e Gres a-zivout Poseidon ha krouañ Thêseus nemet eilpennet eo bet an traoù⁸⁶.

Owein hag e dad Urien Reget a voe daou benn breton istorel hag a stourmas a-enep ar Saozon a oa oc'h aloubiñ hanternoz Breizh-Veur e-kerzh ar 6^{vet} kantved. Kanet e voent gant ar barzh Taliesin⁸⁷ ha staget e voe temoù mojennel oute, temoù a selle ouzh an doue Maponos, moarvat dre ma oa stank an azeulerezh anezhañ hed-ha-hed moger Hadrien dreist-holl, nepell diouzh rouantelezh Reget, eta⁸⁸. Hogen, e Bonhed Gwyr Y Gogled « Ac'hoù Paotred an Hanternoz », e vez lakaet Urien da vezañ mab Kynvarch (« ki-marc'h ») mab Meirchiawn⁸⁹. Evel-se, Owein, breur Mabon pe heñvel outañ er mojennoù, a vefe ivez mab-bihan Kynvarch mab Meirchiawn, un anv ken tost ouzh hini March Konveur - mab Meirchiawn ivez - ken e c'heller krediñ eo ar memes tudenn evit doare.

Ul liamm all etre Owein hag ar roue Marc'h a c'hellfed kaout, marteze, er romant Mélusine skrivet er 14^{vet} kantved gant Jean d'Arras a gont penaos e voe lakaet Urien mab henañ Melusine ha Raimondin, hag ar mab-se a oa divskouarn hir dezhañ. Melusine a anzav d'he gwaz en deus hendadoù breton neuze : mab eo da Herve eus Leon. Divskouarn hir ar bugel a zo evel merkoù pe arouez al lignez vreton a ziskenn Raimondin hag Urien anezhi.

E Sant-Fregan, e Bro-Leon, lec'h m'eo bet dastumet mojenn ar roue Marc'h, e voe implijet ar vojenn-se gant aotrouien ar c'horn-bro evel dannevell-diazez o lignez. Aotrouien Penmarc'h, evel ma raent anezhe o-unan, o doa lakaet tresañ ur penn marc'h war o ardamezioù⁹⁰.

Evit a sell ouzh beskonted Leon, an anvioù roet ingal da bennhêr an tiegezh a zo Herve ha Guimarc'h, ha n'eo ket Urien. An anv Guimarc'h, anv ar marc'h ennañ, a zegas soñj eus ar penn breton Guihomarc'h a rene war hanternoz Breizh e penn kentañ an 9^{vet} kantved.

⁸² Lozac'hmeur, 1980, 262 ; Bromwich, 1961[2006], 427.

⁸³ Bromwich, 1961[2006], triadenn 70, 195.

⁸⁴ Bromwich, 1961[2006], 449-451. Tem mojennel « kannerez ar roudour » an hini eo, un tem anavezet en Iwerzhon (Dagda ha Morrigu) koulz hag e Breizh-Vihan gant ar c'hannerezed-noz. Gwelet a-us. Menegomp c'hoazh « diskan ar c'hannerezed-noz » dastumet gant Emile Souvestre e Gwiseni ha gwall dost ouzh ar gontadenn gembraek : « ken na zeuy kristen salver / red e gwalc'hi hon liser / dindan an erc'h hag an aer. », *Foyer breton*, 1844, p. 73, meneget gant Laurent, 1971, p. 43, notenn 12.

⁸⁵ Lozac'hmeur, 1984, 258.

⁸⁶ Sergent, 2000, 207-208. Diwar-benn ar skridoù kembraek a sell ouzh Mabon, Owein ha Modron, gwelet Bromwich, 1961(2006), 424-428 (Mabon), 449-451 (Modron), 467-472 (Owein).

⁸⁷ Fleuriot, Lozac'hmeur, Prat, 1981, 30-34.

⁸⁸ Sterckx, 1986, 59.

⁸⁹ Bromwich, 1961[2006], Appendix II, 256-267.

⁹⁰ Milin, 1991, 209-219.

Faezhet ha lazhet e voe gant soudarded Loeiz an Devot e-tro 825. E koun anezhañ, moarvat, e voe miret e anv e lignez Leon ha sellet outañ evel diazezer al lignez-se⁹¹.

Un hendad all - etre mojenn hag istor emañ-eñ - a zo da lignez Leon, Kenan « ki » pe « kadour » Meriadeg⁹². Evel m'hon eus gwelet uheloc'h, Kenan a vefe bet kar da Gonveur alias Kynvarch (e gourdad). Hervez Buhez sant Goueznou, Konveur en doa ul lec'h-anez e Lantel, e Bro-Leon, nepell diouzh Brest⁹³. Urien e zivskouarn hir – evel re ur marc'h – ne vefe ket kar da Gonveur, eñ-ivez ? Ha dibab anv roue Reget, tad Owein/Maponos, evel mab Raimondin a vefe bet graet dre zegouezh ?

Chas ha kezeg

Maponos eo al lesanv stankañ roet d'an doue galian-ha-roman Apollon, e Galia koulz hag e Breizh-Veur⁹⁴. Anv ar c'hi stag ouzh hini ar marc'h a gas ac'hanomp war-du daou lesanv all roet da Apollon : *Atepomaros*, « Marc'h bras-meurbet »⁹⁵ ha *Cunomaglos*, « Priñs-ki »⁹⁶. *Cunomaglos* hag ar stumm eilpennet anezhañ, *Maglocunus*, a zo anvioù a gaver stank en holl vroioù keltiek. En hengoun kembraek, an den brudetañ a voe roet an anv-se dezhañ eo Maelgwn – a zeu eus *Maglocunus* -, roue Gwynedd er 6vet kantved. Taget taer eo bet gant Gweltaz en *De Excidio Britanniae*, da heul daou « gi » all : Aurelius Caninus alias Konveur ha Cuneglasus⁹⁷. Ouzhpenn tamall da Vaelgwn bezañ un avoultrer hag ur muntre e rebech Gweltaz da roue Gwynedd selaou laouenoc'h ar meuleudioù graet dezhañ gant e varzhed eget re graet d'an Aotrou Doue.

Barzhed Maelgwn a gaver anv anezhe c'hoazh en *Hanes Taliesin*, enebet ouzh Taliesin. Goude bezañ graet al lu gante e kinnig Taliesin aozañ ur redadeg etre kezeg Maelgwn ha hini Elffin⁹⁸. Met barzhed pe sonerien Maelgwn a zo anezhañ ivez en unan eus stummoù kembraek kontadenn-skouer AT 782, lakaet dre skrid er 16vet kantved : March mab Meirchiawn a oa divskouarn marc'h dezhañ, ur sekred na oa anavezet gant den war-bouez e varver a ziskulias anezhañ d'an douar evit disammañ e spered. Korz a boulzas neuze e-lec'h ma voe graet e ziskuliadenn gant ar barver, ha sonerien Maelgwn a droc'has anezhe d'ober añchennoù evit o binioù. Seniñ a rejont dirak o roue met ne voent ket gouest da deuler an disterañ ton nemet : « March mab Meirchiawn zo divskouarn marc'h dezhañ⁹⁹. »

Gaël Milin, da heul Rachel Bromwich, a soñj dezhañ e voe lakaet Maelgwn en istor-se - evel ma voe lakaet Arzhur en ur stumm all anezhañ - evit sachañ brud war ur gontadenn na oa ket mui anavezet an haroz anezhi, koulz lâret. Ouzhpenn-se, ar stumm-se eus ar gontadenn a c'hellfe bezañ bet levezonet gant *Hanes Taliesin*, dreist-holl gant al lodenn ma vez kontet penaos barzhed Maelgwn n'hellont ober netra nemet balbouzañ « blerwm, blerwm », evel ar sonerien n'hellont seniñ nemet un ton¹⁰⁰.

⁹¹ Guillotel, 1984, 210-212 ; Quaghebeur, 2001, 394.

⁹² Le Baud, 1907-22, III, p. 85 : « L'auteur du Livre des Faits d'Arthur le Preux appelle les vicomtes de Léon Conanigènes, c'est-à-dire qu'ils sont du lignage Conan. » Daou hendad tiegezh Leon a zo ivez daou haroz lae Marie de France, Guigemar (Guigemar ha Meriaduc, gw. Marie de France, Guigemar, 26-71).

⁹³ Le Duc, Sterckx, 1971, 282 ; Bourgès, 1996, 425-426.

⁹⁴ Diwar-benn an Apollon keltiek hag e lesanvioù niverus e taveomp da Sterckx, 1996 (27-29 evit a sell ouzh Maponos) ha Sergeant, 2000, 179-277.

⁹⁵ E Mauvières, Indre. Gw. Sterckx, 1996, 67-69.

⁹⁶ E Nettleton, Wiltshire, *ibid.*, 89-90.

⁹⁷ Kerboul-Vilhon, 1997, 44-50. An anv Cuneglasus, « lanio fulve » e latin, a sinifi « ki melenroux » (« boucher roux » eo an droidigezh kinniget gant Kerboul-Vilhon), ar c'hi o vezañ an hini a zirog, « lanio ». Gw. Fleuriot, 1981, 175.

⁹⁸ Bihan, 2006, 9-15.

⁹⁹ Milin, 1991, 184.

¹⁰⁰ *Ibid.*, 192-196.

Padal, tem ar c'horz troc'het gant barzhed d'ober binvioù dre c'hwezh hag a daol ar memes ton bepred, a zo anezhañ c'hoazh e Breizh-Izel. Amprestet e vefe bet an tem-se digant ar gontadenn-skouer AT 780, « an askorn a gan », kentoc'h eget digant Hanes Taliesin, war a seblant¹⁰¹. Neoazh, evel en istor Taliesin (kezeg Maelgwn), ar stumm kembraek-se eus ar gontadenn AT 782 a ra ul liamm etre ar c'hi hag ar marc'h (Maelgwn ha March mab Meirchiawn).

Al liamm-se a gaver c'hoazh e Mabinogi Pwyll, pa'z a diwar wel en un doare kevrinus ar bugel nevez-c'hanet Pryderi. Mitizhien Rhiannon, mamm Pryderi, a ra o soñj gante lazhañ kekin neuze, ha reiñ da grediñ penaos gwad hag eskern al loened-se a zo re Bryderi bet lazhet gant e vamm. Da-c'houde e voe desavet Pryderi gant un ebeul ganet ar memes deiz eveltañ¹⁰². Epona, heñvel ouzh Rhiannon, a vez skeudennet a-wechoù gant ur c'holen hag un ebeul en he c'hichen¹⁰³.

Hogen, ar c'hi a zo ul loen a-bouez el lidoù pe er mojennoù a sell ouzh doueed an dour pe ouzh tem an Tan en Dour, anavezet er bed indezeuropat a-bezh. Berr-ha-berr, setu ar pezh a c'heller lavaret diwar-benn an tem-se : an tan a ziwan eus an dour ha lakaat a ra anezhañ da zivordiñ a-daol-trumm e degouezhioù zo, da vare ar gor da skouer, pe evit kastizañ un torfedour. An Tan en Dour a arouez ar galloud hag an damani. Azeulet eo evel un doue, dindan anv Apam Napāt en India. En Iran hag en Iwerzhon eo disheñvel an traoù, Apam Napāt ha Nechtan n'int ket an Tan en Dour da vat met e c'houarnourien hepken.

En Iran, war bezhioù moneiz ar Sasanided, eo bet taolennet ar rouanez hag an hêr - danvez roue anezhañ hag heñvel ouzh Apam Napāt « e gezeg prim » eta - gant pep a voned e stumm ur penn ki war o fenn. En India eo ur giez, Saramâ, hag a gavas ar vougev ma oa bet bac'het enni an doureier hag Apam Napāt. En Iran c'hoazh, an *Avesta* a c'hourc'hemmen kaout ur c'hi « gwenn gant divskouarn melen » dezhañ da c'hlanaat ar c'horfoù-marv dre sellout oute. Al livioù-se a zo ivez re dTistrya, ar steredenn Sirius¹⁰⁴. Tistrya, tad Apam Napāt, a zieub an doureier dre en em gannañ gant euzhvil ar gor hag evit se e tro e stumm en ur marc'h gwenn¹⁰⁵.

Sirius eo steredenn ar gor ha graet e vez steredenn ar C'hi anezhi. Da boent he sevel e kroger gant ar mareadoù tommañ eus an hañv. Gouel roman an *Neptunalia* a veze lidet dres d'ar poent-se, d'an 23 a viz Gouere¹⁰⁶. D'ar 25 a viz Gouere e veze aberzhet chas rous gant ar Romaned en enor da Furrina, doueez ar puñsoù¹⁰⁷. An Tan en Dour a zo liammet strizh gant ar c'hi eta. E Breizh-Izel, ar sent a vez lidet e-doug mare ar gor a zo liammet gant ar c'hi - pe ar bleiz - ha gant ar marc'h a-wechoù¹⁰⁸. Ar c'hi « est un *alter ego* du cheval », a skriv Bernard Sergent¹⁰⁹. Marc'h Konveur a vod an daou loen-se dre e anv neuze¹¹⁰.

Ouzhpennet e vo c'hoazh ez eus bet kavet delwennigoù ki, graet gant maen pe metal, e santual Lydney Park, en aber ar stêr Habren. Ar santual-se a oa dediet d'an doue Nodens pe Nodons, heñvel ouzh an doue iwerzhonat Nuada. Nodens/Nuada a gaver roud anezhañ e Breizh-Izel, dindan neuz sant Melar a vo komzet diwar e benn en ur pennad all.

¹⁰¹ Ar pezh a oa bet merzet c'hoazh gant Gaël Milin.

¹⁰² Lambert, 1993, 50-54.

¹⁰³ Sterckx, 1986, 17-40, 47.

¹⁰⁴ Sergent, 2000, 203, 224.

¹⁰⁵ Ibid., 238-239.

¹⁰⁶ Dumézil, 1995, 1135-1139.

¹⁰⁷ Abraham, 1988, 240.

¹⁰⁸ Abraham, 1988, 233-260. Mare ar gor a ya eus an nav a viz Mae - ar c'hentañ gwech eus ar bloaz ma'z a Sirius da guzh - d'an 23 a viz Eost, pa'z a-hi da guzh evit ar wech diwezhañ. Ar c'hi zo dañjerus eus an nav a viz Mae d'ar 25 a viz Gouere, ha gwarezour da-c'houde.

¹⁰⁹ Sergent, 2004, 224.

¹¹⁰ Da notenniñ emañ Sirius e-barzh steredeg ar C'hi Meur.

4 - Kement ha klozañ

Ne oa ket ar pal amañ klask disec'hañ puñs Nechtan o tisplegañ dre ar munud tem an Tan en Dour gant al luziet ha fonnus m'eo hemañ. Kentoc'h klask merkañ penaos, e bed keltiek ar C'hornôg, e voe staget ar gontadenn-skouer AT 782 ouzh doue keltiek ar mor¹¹¹, pe ouzh stummoù zo anezhañ, diantav, da lavaret eo ar roue Marc'h e Breizh-Izel, March mab Meirchiawn e Kembre ha Labraid Loingsech en Iwerzhon. Doue keltiek ar mor, evel e genseurt gresian Poseidon, a zo liammet kreñv gant ar marc'h ha dre-se, moarvat, e voe lakaet dezhañ, evel merkoù loen, un divskouarn marc'h, ar pezh a zo ur perzh dibar d'ar broioù keltiek¹¹².

Gellout a reer klask goût perak, e Gres, n'eus ket un divskouarn marc'h da bPoseidon ivez ha perak eo bet staget ar gontadenn-skouer AT 782 ouzh Midas, divskouarn azen dezhañ, ha n'eo ket ouzh doue ar mor. Evit gwir, ar stumm eus ar gontadenn-skouer AT 782 a sell ouzh Midas n'eo ket gresian a orin, phrygian an hini eo. Er stumm orin n'eo ket kastizet Midas gant Apollon a ro divskouarn azen dezhañ evel pinijenn, met mab Cybele eo Midas ha ganet eo bet gant divskouarn azen¹¹³. Kontadenn roue e verkoù loen n'eo ket bet degemeret er mojennerezh gresian war a seblant, met amprestet ez eus bet ur stumm anezhi diwezhatoc'h, digant ur sevenadur all, ha kemmet ar stumm-se goude.

Er broioù keltiek e c'heller ober un disparti etre stummoù ar vojenn : stummoù Iwerzhon diouzh un tu, gant Labraid, tost-kar da Nechtan ha Manannan ken e c'heller soñjal n'eo nemet un adstumm anezhe. Stummoù Breizh (Meur ha bihan) diouzh an tu all, hag int distankoc'h eget re Iwerzhon evel kustum : roue Marc'h Kerne-Izel, a voe staget e vojenn ouzh ar priñs breton Konveur, penn ar morlu breton anezhañ ha dre-se heñvel ouzh March mab Meirchiawn an hengoun kembraek. Kement-se a zo kadarnaet c'hoazh gant enskrivadur piler Fowy, ken kozh hag ar 6vet kantved, hag a ginnig Konveur evel tad Tristan. Eontr Tristan eo March mab Meirchiawn an hengoun kembraek. En ur pennad all e vo distroet war al liammoù etre Tristan ha roue Marc'h e zivkouarn marc'h.

Levrlennadur

- Abraham, Maryvonne, 1988. « La canicule en Finistère. A la recherche du calendrier d'été du chien en Basse-Bretagne. », *BSAF*, 117, 233-260.
- Bihan, Herve, 2006. « Dafar evit studi mojenn Taliesin. », *Hor Yezh*, 248, 3-20.
- Bourgès, André Yves, 1996. « Commor, entre le mythe et l'histoire. », *MSHAB*, 74, 419-427.
- Bromwich, Rachel, 1961[2006]. *Trioedd Ynys Prydein*. Cardiff : Gwasg Prifysgol Cymru.
- Cassen, Serge, Pierre-Arnaud de Labriffe, Loïc Menanteau, 2006. « Le sel 'chauffé' des baies marines en Armorique-sud durant les 5^{ème} et 4^{ème} millénaires av. J.C. : à la recherche (ouest-européenne) de croyances et de faits techniques. », *Le Sel de la Baie. Histoire, archéologie, ethnologie des sels atlantiques*. Rennes : PUR, 33-54.
- Clément, Michel, 1979. « Fouilles du temple gallo-romain de Trogouzel. », *Archéologie en Bretagne*, 24, 23-25.

¹¹¹ Notennomp memes tra e voe staget ar gontadenn-se ouzh ar roue Eochaid ivez, da lavaret eo ouzh an Dagda.

¹¹² Milin, 1991, 18 notenn 10.

¹¹³ Milin, 1991, 27-29.

- Daire, Marie-Yvane, 2003. *Le sel des Gaulois*. Paris : Errance.
- Dumézil, Georges, 1995. *Mythe et épopée*. Paris : Gallimard Quarto.
- Duval, Paul-Marie, 1957[1976]. *Les dieux de la Gaule*. Paris : Payot.
- Etienne, Robert, 1962. *Bordeaux antique*. Bordeaux : Fédération historique du Sud-Ouest.
- Eveillard, Jean-Yves, 1975. « De la conquête romaine à l'immigration bretonne : histoire. », *La presque-île de Crozon : histoire, art, nature*. Paris : Nouvelle Librairie de France, 25-53.
- Fleuriot, Léon, 1981. « Du gaulois au breton ancien en Armorique. », *BSAF*, 109, 165-194.
- Fleuriot, Léon, 1999. *Les origines de la Bretagne*. Paris : Payot.
- Fleuriot, Léon, Jean-Claude Lozac'hmeur, Louis Prat, 1981. *Récits et poèmes celtiques*. Paris : Stock.
- Flobert, Pierre, 1997. *La vie ancienne de Saint-Samson de Dol*. Paris : CNRS.
- Galliou, Patrick, 2005. *L'Armorique romaine*. Brest : Armeline.
- Giot, Pierre-Roland, Jacques Briard, Louis Pape, 1995. *Protohistoire de la Bretagne*. Rennes : Ouest-France Université.
- Gouletquer, Pierre-Louis, 1970. *Les briquetages armoricains : technologie protohistorique du sel en Armorique*. Rennes : Laboratoire d'Anthropologie Préhistorique.
- Guillot, Hubert, 1984. *La Bretagne des saints et des rois. 5^{ème}-10^{ème} siècle*. Rennes : Edilarge, Ouest-France. Eil lodenn : *le temps des rois, 9^{ème}-10^{ème} siècle*.
- Guyonvarc'h, Christian-J., Françoise Le Roux, 1983. *Morrigan-Bobd-Macha : la souveraineté guerrière de l'Irlande*. Rennes : Ogam-Celticum.
- Guyonvarc'h, Christian-J., Françoise Le Roux, Myles Dillon, Nora Chadwick, 2001. *Les royaumes celtiques*. Crozon : Armeline.
- Kerboul-Vilhon, Christiane M.J., 1997. *Gildas le Sage, vies et œuvres*. Traduction. Sautron : éd. du Pontig.
- Lambert, Pierre-Yves, 1993. *Les quatre branches du Mabinogi et autres contes gallois du Moyen-Age*. Paris : Gallimard, l'aube des peuples.
- Laurent, Donatien, 1971. « La gwerz Skolan et la légende de Merlin. », *Ethnologie Française*, 1, n° 3-4, 19-54.
- Laurent, Donatien, Michel Treguer, 1997. *La nuit celtique*. Rennes : Terre de Brume, PUR.
- Le Baud, Pierre. *Croniques et ystoires des Bretons*. Rennes : Société des Bibliophiles Bretons, 4 tomes, 1907-1922 (ademb.)
- Le Duc, Gwenaél, Claude Sterck, 1971. « Les fragments inédits de la vie de saint Goeznou. », *ABPO*, 78, 277-285.
- Loth, Joseph, 1890. *Chrestomathie bretonne (première partie : breton armoricain)*. Paris : Emile Bouillon.
- Lozac'hmeur, Jean-Claude, 1980. « A propos de l'origine du nom de Mabonagrain. », *EC*, 17, 257-262.
- Lozac'hmeur, Jean-Claude, 1984. « Recherches sur les origines de la légende d'Yvain. », *EC*, 21, 257-263.
- Marie de France. *Lais*. Traduits, présentés et annotés par Laurence Harf-Lancner, texte édité par Karl Warnke, Paris : Lettres gothiques, 1990.
- Maurin, Louis, 1978. *Saintes antique des origines à la fin du 6^{ème} siècle après Jésus-Christ*. Saintes : Société d'archéologie et d'histoire de la Charente-Maritime.
- Merdrignac, Bernard, 2004. « Généalogies et secrets de famille. », *Corona Monastica : moines bretons de Landévennec : histoire et mémoire celtique. Mélanges offerts au père Marc Simon*. Rennes : PUR, 265-276.
- Merlat, Pierre, 1952. « Note sur une base consacrée à Neptune trouvée près de Douarnenez. », *Gallia*, 10, 67-75.
- Milin, Gaël, 1989. « De la dormition des héros au purgatoire chrétien : la légende bretonne du tombeau du roi Marc'h. », *Mélanges offerts au professeur Louis Le Guillou*, Brest : UBO, 21-33.

- Milin, Gaël, 1991. *Le roi Marc aux oreilles de cheval*. Genève : Droz.
- Pape, Louis, 1978. *La Civitas des Osismes à l'époque gallo-romaine*. Paris : Klincksieck.
- Pape, Louis, 1995. *La Bretagne romaine*. Rennes : Edilarge, Ouest-France.
- Quaghebeur, Joëlle, 2001. *La Cornouaille du 9^{ème} au 12^{ème} siècle. Mémoire, pouvoir, noblesse*. Rennes, Quimper : PUR, Société archéologique du Finistère.
- Sanquer, René, 1973. « Une nouvelle lecture de l'inscription de Neptune trouvée à Douarnenez (Finistère) et l'industrie du Garum armoricain. », *ABPO*, 1, 215-236.
- Sanquer, René, 1973a. « La grande statuette de bronze de Kerguilly-en-Dinéault (Finistère). », *Gallia*, 31, 61-80.
- Sanquer, René, 1975. « Les industriels des salaisons en Armorique romaine. », *Du Léman à l'Océan, les eaux en Gaule, rivages, sources, fleuves et vallées. Actes du colloque organisé par l'institut d'études latines et le Centre de recherches André Piganiol*. Tours : Université de Tours, 148-156.
- Sanquer, René, Donatien Laurent, 1971. « La déesse celtique du Ménez-Hom. », *BSAF*, 97, 85-105.
- Sanquer, René, Patrick Galliou, 1972. « Garum, sels et salaisons en Armorique gallo-romaine. », *Gallia*, 30/1, 199-223.
- Sergent, Bernard, 2000. « Elcmar, Nechtan, Oengus : qui est qui ? », *Ollodagos*, 14/2, 179-277.
- Sergent, Bernard, 2004. *Celtes et Grecs II, le livre des dieux*. Paris : Payot.
- Simon, Frère Marc, Pierre-Yves Castel, 1985. *L'abbaye de Landévennec de saint Guénolé à nos jours*. Rennes : Ouest-France.
- Sterckx, Claude, 1986. *Eléments de cosmogonie celtique*. Editions de l'Université de Bruxelles.
- Sterckx, Claude, 1996. *Dieux d'eau : Apollons celtes et gaulois*. Bruxelles : MSBEC.
- Tanguy, Bernard, 1975. « Toponymie et peuplement. », *La presqu'île de Crozon : histoire, art, nature*. Paris : Nouvelle Librairie de France, 55-85.
- Tanguy, Bernard, 1990. *Saint Hervé, vie et culte*. Tréflévenez : Minihi Levenez.
- Tanguy, Bernard, 1990a. *Saint Paul Aurélien, vie et culte*. Tréflévenez : Minihi Levenez.

Berraduriou

ABPO	Annales de Bretagne et des Pays de Loire
BSAF	Bulletin de la Société Archéologique du Finistère
CNRS	Centre National de Recherche Scientifique
EC	Etudes Celtiques
MSHAB	Mémoires de la Société Historique et Archéologique de Bretagne
MSBEC	Mémoires de la Société Belge d'Etudes Celtiques
PUR	Presses Universitaires de Rennes
RC	Revue Celtique
UBO	Université de Bretagne occidentale

